

da ze o dimezi.

I

Merglet, poultrennet 'vel m'eman,
Kregi 'n em zelen a renkan,
Urz am eus bet;ret eo senti:
Krog 'n ez telen ha son ganti.

2

Em c'hreiz e zo,e gwirione,
Eur gaer a son,mar gallfen me
He dispaka,he c'hana c'houek,
Vel ma karfen, e brezoneg.

3

Met ar pep nesan d'ar galon,
-Hag a zo enni kuzet don,-
D'hen desrevel 'vel ma karfer,
Na komzou,na ton na gaver.

4

Ha koulskoude,gwir eo lâret,
Dirazon me wel evurusted,
Me 'wel yaouankiz ha buhe...
Da ganan, kaerat digare.

5

Me 'wel laouen tal eur pôtrig;
Me 'wel seder tal e zousig;
Me 'wel ar mammou leun a stad...
Penôs ve ket laouen an tad?

6

Kanomp eta, ma zelennig,
War bep suert tön,flour ha dousig,
War bep tön,rak diou blanedenn
En em vesko war da gerden.

7

Diriou,du-ze,'n em iliz wenn,
Eur plac'hig a stoue he fenn,
O kemer,-gant pebez dudi. -
Hanc Leanezed Kluni.

8

He flas,aman,a zo goullo,
Met beo-buhezek e chomc
Sonj ar verc'hig a Vreiz-Izel
'N em ouestlet dont d'ar briou pell.

9

Heuilhet-i erméz hag en ti,
Nemet skouer vat ne oa ganti;
Nemet c'hoant da senti bepred
Ouz ar Vouez he doa he galvet.

10

Ann-Mari, leanez vihan,
Piou a lavaro pegen glan,
Piou a lavaro pegen gwerc'h
Ar roudou chomet war ho lerc'h.

II

'R garante 'zc eur vedalenn,
Pep tamm anei en aour melen;
En eur tu 'man Doue hapken,
En tu all, Doue hag an den.

I2

Gant se,hevelep medalenn
Doug Ann-Mari ha Madalen
Ha daoust d'eze da vont dispar,
O diou blanedenn a zo c'har.

I3

An eil merc'h a gavas he mad
Tost d'ar gêr, kichen mamm ha tad;
Gant gwazig eus bro S. Gweltas,
Gwazig Treger en em veskas.

I4

Eurvad ra c'hoarvezo gante.
Ra redo flour an diou vuhe
Ha ra lakfont 'n hon meziou-ni,
Bleunicu breizat puilh da griski.

I5

Ma zell a gouez warnoc'h,kerent,
Ho peus klasket hirie an hent
Da zont d'an diou gérig didrous,
Koat-ar-Roc'h ha Kermabrouz.

I6

Ma zell, kerent, a gouez warnoc'h;
Ma sonj,souden,a dec'h pelloc'h,
A nij a-bell,da gât ar re
Ganet aman eveldon-me.

I7

Eur c'hoar,bet savet em c'hichen
Ha laket ganti 'n he c'herc'hen
Krcaz arc'hant al leanezed,
Skouer ha melour he nizezed.

I8

Ha moereb,mamm-goz,eontr ha tad;
Me gred 'maent aze,'neur blokad,
Gant eur mousc'hoarz en o zellou,
O heuilh hon ebad,hon festou.

I9

Ha ganimp,hall e lavaront:
D'ac'h,bugale,eurvad,sof-kont,
Ha ra lakfet,eveldomp-ni,
Enor ho tiegez da griski.